

Chanson

Entre daou zen yaouanc en em garric fidel.

(53, suite)

Var ton :

Tostait, tud yaouanc, tostait da glêvet
Ha c'houi, dre breferanç, calonou gonezet,
Ha me zisclêrio dec'h ebars en bêr amzer,
Va buez desolet, pa meus lec'h d'ey ober.

Doue da gonsolo calon disonsolet,
Dre exempl ar vertus alies redoublet :
Carout eur ~~fencler~~ dre wir fidelite,
Nemeus nemet glac'har demeus va amitie.

Me meus bet ur bonneur ha ne veriten get,
Da roul' va yaouanqis en dezir va souhet,
Darempredi merc'hed a bep seurt qalite,
Re vil, re basur, re goant, re eus a galz leve.

(54)

Goneet o c'harante vis-a-vis d'am hini,
Dezir va bolonte, hervez va fantazi;
Ha nobstant gementse, me a zo dezolet
Pa laqan va memor da zonch en ze heperet.

M'am bize ar speret da ellout explica,
Sclerdet em daoulagad, me deuje da scrifa,
Erit explica sclêr amân d'an dud yaouanc
Ar garante dener hac ar c'homzou touchant.

Er spaç eus a bemp bloas me a meus goneet
Eur nebeut mad demeus a galonou merc'hed;
Ne gavis nemet unan e deus va goneet
Dre biriou Cupidon em c'halon bet lancet.

Onnes eo an objet, hervez va fantazi

Rouanez va c'halon : ne garan nemet hi,
 Edeus va gonezet, gant va bolonté vad ;
 Glac'har meus em c'halon o tonet d'e c'huitât.

(55) Selaouit, tud yaouanc, sperejou curius,
 Va c'halon zo rannet, hoc'h hini zo joais.
 C'houi c'houlén ar sujet a separation
 Deus va muia caret a zougán em c'halon.

Ar sujet d'he c'huitât neo get eus va c'hoste :
 Me c'harriz em c'halon dre wir fidelité ;
 Mes e humor frañil, o tonet d'am c'huitât,
 A ra din scuill daelou ha leusqel huanad.

M'am bije sclérigen ebars em daoulagad,
 Speret evit parlant, ha nery evit qerzat
 Da vont da dy va douç, va oll blijadurez,
 Da bronng ar setang deus va zristidiguez.

Astrou demeus an ên, menezjou an douar
 Deut, deut d'am c'honsoli en nobstant d'am glac'har ;
 Deut da dy va mestrez, va c'honsolation,
 Da sina ar setang a separation.

Bonjour d'c'h, va Mestrez ; pa meus an avantach
 C'hoas eur vech da barlant vis-a-vis d'ho pisach.
 Ha d'c'h, va zervicher, plijadur va speret,
 Petra zo a néve ? Terruñ e zoc'h chenchet !

(56) An neventi a meus, va douç ? c'houi voar erwad
 Pa zeo giir oc'h qiriec demeus va c'halonad.
 Sqei a rit em c'halon flemmou goal dinatur,
 Glac'har ha melconi, hirvoud, displijadur.

C'houi a deuyo da zouffr gant giir boziantet
 Huanadou va c'halon ha glac'har va speret.
 Me souhet d'c'h, va mestrez, en durant ho fue,
 Yec'hed, plijadurez, dezir ho polonté.

Destinet eo e chang er bed da bep hini
 Ha merqet dean 'r plaç e pini ec'h arri.

128

Me zônje, va mestrez, en amzer dremenet,
E vijemp priedou en hini da zonet.

Va flaneden galet ha va chanç dinatur
N'o deus accordet din nemet displijadur.
Grêt em boa va fossubl vit ellout o dervi,
Mes me o quel o tont enep d'am fantazi.

Va amzer dremenet, va oll blijadurez,
A c'halon ha va c'halon, pa zônjan em mestrez;
Pa zônjan er sujet hor separation,
Eo troublet va speret ha mantret va c'halon.

Arça-ta, den yaouanc, dont a rit d'am c'huittat,
Goude bet ho caret dre va bolonté vad!
Grêt em boa va fossubl vit gouit ho calon;
Brêmân, va zervicher c'huï men abandon.

(57)

Va c'halon, va mestrez, zo ganec'h goneet,
Va c'harante fidel, va c'horf ha va speret,
Abse nontec mis zo ne meus plijadurez
Nemet epad ma ven en ho compagneuz.

Sônch oc'h eus-hu, va douç, demeus ar preposiou
Hor boamp-ni prononcet hac affirmet hon daou,
Gant hon daelou c'klebia hon daou mouchoer,
Vel pa vijent trempet er stang pe er rivier.

Mar teujomp d'o c'klebia gant daelou hon daoulagad,
Credit, va zervicher, bet persuadet mad,
Rac m'em boa eur mignon na garan nemetâ,
Eus e quittat e teu va c'halon da ranna.

Fleurey an eol brillant, al loar hac ar stered,
Pere, en peb amzer, o deus va c'huinduet,
Da vont da dy va mestrez, coulç en nôs vel en de;
Disclêriet em absanç brêmân ar virione.

Ha p'am bez a vlavez genlies da veva
Evel a vinut zo e zôn var an douar,
Ha me laqet var choas demeus an oll merc'het,

(58)

Birwigen ne gafen eveldoc'h d'am souhet.

Ne get difficult din donet da greiz ya :
 Va c'horf ha va spereet, ha va oll amitie
 Oc'h eus goneet, deñ yaouanc, gant va bolonte vad :
 Quiell eo ganén mervel equet dont d'ho quittäat.

Me ive, va Mestrez, deus a greiz va c'halon,
 Gent prononç ar setanç a zeparation,
 A c'halv ar maro cri da zonet d'am laza,
 Vit na chomin pelloc'h er bed da languissa.

Mestr souverey d'an oll, Roue d'an oll Okle,
 Crouer ar sperejou, barner ar virione,
 Consolit ac'hanomp en hon affliction,
 Pe roit ar maro, p'e dezir hor c'halon.

Eur voez demeus an én a glévomp meurbet scler,
 A deus d'hor c'honsoli en eur memes amper,
 Da zouffr hon oll glac'hor gant quier baciântet,
 E mâ ar recompanç bars en hent o tonet.

(59) Gwi vije ar galon, hac ive dinatur,
 Ma na deus da vouela var hon displiadur,
 Ouz hor quielet hon daou ouz en em disparitia,
 Ha gant eur môr daïlou an douar o rusia.

Adieu-ta, deñ yaouanc, va oll blijadurez ;
 Adieu, va zerricher, gen a vo da james.
 Bezomp fidel d'ar Verc'hez, meulomp-hi deiz ha nôs ;
 Adieu, va mestrez qez ; gen'vo er barados !

(Vol. VII, p. 53-59.)
 strophes non numérotées.